


G U E R Z

*Var sujet un Den Yaouanc a voa deut da baea
pevar scoët goude e varo.*



SPERET-SANTEL, m'ho ped, auflamit va speret,
Da gana ur c'hantiq evit ar Vretonet,
Var sujet un exempl trist pehini zo erruet
Ebars en Breiz-Izel, e mis Du tremenet.

Crena ra va c'halon ive va oll memprou,
Va daoulagad ne reont nemet scuilla daëlou,
O tont da gonsideri peguen trist eo ar matier:
Goulen a ran sicour eus ar Verc'hez santel.

Un den yaouanc, sivoas, voa n'em abandonet,
Goude ma voe maro e dud gant ar c'blénved,
A voa n'em abandonet da bep seurt tristediguez,
Da bep tristediguez, da beb sort paourentez.

Evel ma voa yaouanc, ne grede clasq netra:
Tud vad, dre charité, a gaç tamou dezâ;
Ilac evel ma voa yaouanc e teujont d'er scandalat
Pa na gare sevel ha mont da labourat.

Souffr a ra mil injur gant güir baciasantel,
O laqat e fizianc er Verc'hez beniguet,
Dre m'en devoa e imach hac hini ar Bassion
Ha ma rê diraze bemdez e orêson.

Yn 408

2

Un den eus arc'hontre, un den eus arc'hartier
A deus d'e velet, o clevet e vizer,
En eur lavarar dezàn : deus d'am zi da labourat ;
Arc'hèz a respontas : ne meus qet a zillad.

Gouzout a ràn certen labourat an douar ;
Mes allas ! eme'r paour, ne meus na pal na mar ;
Pêvar scoët a vancse din evit en em eqipa ;
Me a yêlo d'ho ti sur evit ho paea.

An ozac'h var ar guer a ro ar pêvar scoët,
O lavarar dezàn ; Va mignou, ne vanq qet,
En eur lavarar dezàn : Deus d'am zi da labourat
Pa po bet pal ha mar ha prenet da zillat.

Monet a ras d'e di, ma voe ur pennad mat ;
Plijout a rê deze certen da labourat ;
Un devez dreist ar re all e voet meur bet estonet
O sônjal er paour-qèz pelec'h e yoa chommet.
Ma ejont ta da velet, hac e-voe cavet maro
Ebars en e lochic var un dornad colo.

Lienet voe e gorf vit beza entêret ;
Ar brud a savas prest, ma teujot d'e velet ;
An den-mâ' deuas ive evel m'oa eus ar c'hanton,
A deuas d'e velet. O Doue, pezh eston !

Pa zorti eus an ti, d'an dud e lavare :
Orato birvigen e ene ne antre
En Barados un Doue, qen en devezo paeet
Ar pezh a rois dezàn neus qet pell pêvar scoët.

Dre ar c'homzou terrupl pere a brononças,
N'oun penaus an douar d'e lonqana zigoras,

Oc'h arrêti un ene a voa o vont d'ar joayou,
A vije recevet gant Jesus en ênvou.

Ar Verc'hez beniguet, dre ma voa dei fidel,
A accord ur mennat evit he zervicher,
Ma teuje var an douar un instant da labourat,
Evit monet d'an li da baea ar barbar.

Monet a ras d'e di ha ma voe recevet;
Goulen a ra labour, ma voe dezàn roet;
Labourat a ra er parq qement hac an tri güella.
Ar pez zo estonus, hep debri nac eva.

Pa zeu coulz ar repas, caër e vije'r pedi
Evit monet gante assambles da zêbri,
En em denne a goste, hac eno var e c'hinou
En em string d'an daoulin evit souffre boaniou.

Dont a ra'n usuiller, qemer a ra eston,
Hac én monet ractal da laret d'ar Person
En devoa ul labourer hac a rê qement ha tri,
Ar pez zo estonus, hep eva na dêbri.

Mâ, eme ar Person, cuntinuit bepret;
Bremâ souden vatant me yêlo d'e velet.
Mes pa êruas er parq, dre bermission Doue,
E hanavezas pront penos voa un ene.

Me conjur, eme'r Person, lavar din, me a ped,
Ne qet hirio eiz de em boa da entêret?
Petra a zefot dide? Петра a glasqes amâ?
Petra a zefot did evit da zelvra?

Pêvar scoët am boa bet digant mestr an ti-mâ,
On deut dre vouir voyen sur evit o faëa:

Oh ! eleac'h pèvar scoët, eiz certen a vo roet
Ur veach, ene paour, qen a vi delivret.

Ne meus qet ar pouvoar da antren er joayou,
Nemet gant va Æl-mat e clêfen ar c'hêlou;
Pedit Doue evidon, me a za prest d'an êvou;
Varc'hoas d'ar memes heur me rento ar c'hêlou.

Dont a rà ar Person da zigac'an arc'hant,
Ma vije delivret a boan hac a dourmant.
Mes me, eme an ene, am boa-int bet digantàn;
P'oc'h eus ar vadelez, me o rento dezàn.

Pa astennas e zorn da guemer an arc'hant,
E santas an ardeur, ar boan-hac an tourmant;
E vrec'h deo hetec e scoa en instant a voe dêvet,
An arc'hant eus e zorn d'an douar zo quëzet.
Adieu, autrou Person, me ya bremâ d'ar joayou,
Me bedo evidoc'h Jesus-Christ hon Autrou.

Pa dleo un den d'ec'h, pa yel eus ar bed-mâ,
Elec'h desirout drouc, pedit Doue gantâ:
Pedomp bepret ha meulomp mâ zefont da repos
Ha da veuli Doue en gloar ar Barados.

FIN.



GUERZ AR GARNEL.

DEME d'ar Garnel, Christenien, güelomp ar
Religou.

Eus hor breudeur, c'hoarezet, hon-tadou ha
mamou,

Demeushon amezeyen, hor brassa mignonet,
Güelomp ar stat truezus e pini int rentet.

Güelet a reot anezo torret ha bruzunet,
Ha memes an darnvuia a zo e poultr rentet;
Ne veler mui o noblanç, o danvez, o guenet,
Ar maro hac an douar o deus o distrujet.

Ar paour hac ar pinvidic, ar mestr hac ar sujet,
Oll e zint rentet-henvet, oll int dizenvelebet;
Ne zeus mui nemet esqern, poultr ha breina-
durez,

Dign eus a gompasion hac eus a bep truez.

Hoguen er stat truezus e pini int rentet,
E parlantont e langach mud eloquant meurbet
Ouz peb-unan ac'hanomp, mar qeromp profita
Qeit ma plijo gant Doue hon lezet er bed-mâ.

Clêvit eta anezo, ha grit attantion,
En dezir da brofita eus a greiz ho calon:
Lavarata rin deoc'h e zint het er bed-mâ,

Hac e varvfot evelto pa s'oujot nebeuta.

Nizobet varan douar or'ën qercoulz hac'houi,
O parlant hac o vale, oc'h eva, o tebri,
Ha cetu amâ bremâ er stat ma zomp rentet,
Goude m'omp bet en douar o vezur ar prénved.

M'oa un den crén ha galant, ha me un dijentil,
Me voa un den piovidic, ha me un den habil;
Me meus collet va noblanç, ha me va oll dañvez,
Me va nerz ha va guenet, ha me va güizieuez.

N'hon eus cavet er bed-mâ nemet hon œuvrou
mad

Da bresanti d'hor Barner, d'hon Roue ha d'hon
Tad;

List eta madou'n douar, detestit ar viçou,
Hac ornit mad hoc'h ene a bep seurt vertuziou.

Margoulennit diganemppelec'h êt hon eneo,
Ni respointo: d'ar purgator, rac ounes ê hor bro:
E maint en tâo o têvi vit peur-baea o dle
Contractet var an douar da justio un Doue.

Eus a ouelet ar flamou ne cessont o crial,
O c'houlen ho pedennou, ma ellint sortial
Eus ar prisoniou teval e pere int tolet:
Hastit, hastit d'o zicour, ha na zaleit get.

Dêc'h-u en em adressomp, qerent ha mi-
gnonet,

Da gâout memdr ac'hanomp pazit dre ar vêret.
Lavarit en eur dremen: Doue ra bardono
D'an anaon er Purgator, rac honnes eo hor bro.

Un aluzen, ur beden grêt gant devotion;

Ur yun pe un oferen, pe ur gommunion,
A ell calz hor soulaji ha berrât hor poanniou,
Hac hon tenn en un instant a ouelet ar flammou.

C'houi, Bêleyen charitabl en eus hor c'hun-
duet

En hent hor zilvidiguez, pa edomp var ar bed,
Cuntinuit c'hoas un nebeut da gaout truez ou-
zomp,

Oc'h ober, dre drugarez, œuvrou mad evidomp.

Ispicial ho pedomp pa deuit da celebri
An Oferen en ilis, clêvit neuze hor c'hri
Eus a ouelet ar flamou o c'houlen diganeoc'h
Ma teuot d'ober gant Doue dre'r Sacrific hor
peoc'h.

Ha p'or bezo peur-baeet ar boan dlee d'hor
pec'het,

Ni hor bezo dêc'h neuze digant Doue requet
Pedit, ni a rai ive; en em sicouromp oll,
Ennes vezo ar voyen ne deuyo-den da goll.

Evel an dour o vougâ an tân-goall alumet,
An tân eus ar Purgator a vez ive mouguet
Dre ar Sacrific santel offret var an Auter,
Da c'houlen hon delivranç ouz Doue hor Zalver.

Pa zorti an col squeudus a zindan ar gouabren,
Ar bed oll en un instant a receo sclêrijen:
Ni a zortio ive sclêr evel ar stered

Eus ar poaniou a zouffromp dre'r Sacrific offret.

Adieu, tadou ha mamou, breudeur ha c'ho-
rezed;

Adieu, qerent, mignonet ; adieu dèc'h , tud ar
bed :

Ni a ra brema deoc'h hor c'himiad diveza ;
Adieu deoc'h : qen a vo e traouyen Josapha.

Roitar repos eternal, va Jesus, va Antrou,
D'an oll eneou fidel pere zo er flammou,
Ebars en ho Parados, da veuli da james
Assambles gant an oll Zent ha gant an oll Ælez.

Piou ac'hanomp, va Doue ! n'en devez di-
voeret

Un tad, ur vam, ur buguel, qerent all, migno-
nel ?

Bisitomp-ta o beziou, ha pedomp a galon :
Un douçder an tenerra eo d'ur c'hristengüirion.

Daoulinet var o beziou, e credomp fermamant
En ur bedi evito, int d'hor speret presant.

Lavaromp-ta evito, gant hor Mam, an Ilis,
Ur *Miserere mei* hac un *De profundis*.

DOUE RA-BARDONO D'AN ANAON!



E Montroulez, e ty LÉDAN, e traon ru ar Vor.